

"Te a gomz ma yezh / te a oar redek"

gant klasad ar re CM1 CM2 skol A. Lefebvre Ploueg-ar-Mor

1)

Tro-war-dro ar bed,
da bep lec'h ec'h an
Den ebet ma c'hompren
Den ebet na oar pezh 'h on 'klask
lâret

Da bep lec'h ec'h an,
den ebet ma c'hompren
Ouzhin e sellont pa gomzan dezhe
O fenn ' skrabont 'n ur lâr't
« Peseurt 'h out klask
lâret ? »

Met me.... me a oar redek !
Hei ! Bevet 'r Redadeg !

2)

Tro-war-dro ar bed,
da bep lec'h ec'h ez
Den ebet da gompren
Den ebet na oar pezh 'h out 'klask
lâret

Memes er gêr du-mañ
Aezetoc'h 'vez dit skrivañ
Ouzhit e sellont pa gomzez dezhe
Neuze e skrusont 'n ur lâr't :
« o lâret peseurt emañ ? »

Met te te a oar redek !
Hei ! Bevet 'r Redadeg !

3)

Tro-war-dro hor Breizh,
bremañ e redomp
Evit ar brezhoneg
War an hent, deomp betek Gwened !

A-gleiz hag a-dehoù
E-pad an noz a-wechoù
Asambles redomp, evit hon yezh
Gant hor familh, hor
mignoned
Betek an trec'h bepred !

Ya ! Ni ni a oar redek !
Hei ! Bevet 'r Redadeg !
Ha c'hwi.... c'hwi a oar redek !
Hei ! Bevet 'r Redadeg !

